


Un abadenn “Lenomp asimpl” a zo bet aozet d’ar sadorn 15 a viz Genver 2022 e Mediaoueg Brec’h.

6 den o deus en em gavet aveit komz diàr-benn ar pezh o doa lennet: Daniel, Solenn, Patrick, Bernard, Thierry, Jakez.

- Da gentañ, Solenn he deus kiniget deomp komz diàr-benn tri levr he deus lennet:

- “**Là où chantent les écrevisses**” skrivet get Delia Owens: Kya a zo ur plac’h 10 vlez, dilezet get e familh. Ret eo dezhi bevañ hec’h-unan e-barzh ar gwernegi, tost Barkley Cove, ur ger eus **North Carolina**. En em gavout a ra get Tate, un den yaouank, habask ha desket, hag a zesk da gKya lenn ha skriv. Met ret e vo da dTate mont kuit aveit e studioù. Chom a ra Kya en hec’h-unan ha diaes eo dezhi bout dilezet en-dro. Ne daol ket he fiziañs get den arall ebet é promeiñ dezhi ur vuhez nevez ...




- “**Prodigieuses créatures**” skrivet get Tracy Chevalier: Er blezadoù 1810, e Lyne Regis, àr aod an Dorset e tizolo Mary Anning he fosiloù kentañ. Chañj a ra an dizoloadenn-se he soñjoù diàr-benn penaos eo bet krouet ar bed. Na bout e oa d’ur familh izeleg, e vo ret dezhi talañ doc’h falskredenoù bed ar skiantourion. Harpet e vo get ur plac’h arall, Elizabeth Philippot hag a sikouro geti en hec’h enklask.

- “**Changer l’eau des fleurs**” skrivet get Valérie Perrin. Violette Toussaint a ra àr-dro ur vered el porzhier. En he lojeris en em gav tud o digoriñ o galon dezhi. Un deiz, e arriv un den hag e vaouez hag a ziviz chom asimpl da renoz e-barzh ar vered-mañ. Chañj a ra tout an traoù. Liammoù etre an dud vev hag ar re varv é tonet er-maez ag o beziou; eneou hag a seblantae du en em ziskouez lugernus!



- *Neuze, Daniel en deus komzet deomp diàr-benn ur levr e brezhoneg:*




- “**Marc'heger ar marv**” skrivet get Peter Tremayne ha troet doch ar saozneg e brezhoneg get Jean-Michel Mahé. 664 goude JK. Emañ Fidelma o kuitaat Roma hag a-raok distreiñ d'ar gêr ez a betek abati Bobium evit ober ur weladenn d'he c'helenner kozh, ar breur Ruadan. Gwall c'hloazet eo hemañ hag emañ war e dremenvan. Amzer en deus evelkent da silañ un toullad gerioù e skouarn Fidelma a-raok mervel. Buan-tre e wel Fidelma ez eus itrikoù ha kasoni don etre kristenien ha paganiz er c'horn-bro-se. Penaos kompren ar pezh a c'hoarvez pa ne gomzer ket yezh ar vro ha pa n'haller kaout fiziañs e den ebet ? Fidelma zo hec'h-unan penn o klask dirouestlañ kavailhoù a bep seurt ha muntroù e-leizh.

- *Goude-se, Jakez en deus kiniget deomp un enklask graet get Daniel Giraudon hag embannet dindan an titl “**La clef des chants**”.* Diàr-benn ar gwerzioù emañ skrivet al levr-se. Meur a werz a gont istorioù spontus ha trist. Met gwir eo ar pezh a gont ar gwerzioù? Pe mojennoù int ? Daniel Giraudon a glask kavout ar wirionez, petra zo arruet da vat? Dre an dielloù ha pozioù disheñvel en deus lakaet àr well petra zo arruet a-benn ar fin.





Leïla Slimani Le pays des autres



- *D'e dro, Thierry en deus komzet ag al levr skrivet get Leïla Slimani: “**Le pays des autres**”:* E 1944 Mathilde, ur plac'h a vro Elzas a gouezh e karantez get Amid Belhaj, ur Marokan hag a stourm en arme bro Frañs. Goude an dieubidigezh en em stal ar c'houplad e Maroko, e Meknes, ur gêr e-menn ez eus goarnizonoù hag un toullad trevadennerion. Ne vez ket aes ar vuhez. Amid a labour un douar meinek ha Mathilde a zo gwasket get an aerglec'h strizh en dro dezhi. Tamm ha tamm e vev tout an tudennoù – ar soudarded hag ar beizanted, an trevadennerion hag ar poblañsoù henvroat - a seblant bev ‘barzh bro tud arall; ar maouezed, dreist pep tra, “barzh bro ar wazed”.

Bernard en deus lennet daou levr hag en deus kavet interesus

- **“L'étrange affaire de Pont-Sal”** skrivet get Jean GUILLOT; Jean Guillot a zo ur c'homiser à e leve, intereset get mare ar chouaned. Srivet en deus dija “Les derniers chouans du Morbihan”. El levr-mañ, e komz deomp ag un torfed arruet d'an 3 a viz Kalañ-Gouiañv 1847, e Pont-Sal, ul lec'h etre Gwened hag An Alre, tost da Veriadeg. Ur dilijañs a oa ec'h ober ar veaj etre Naoned ha Brest get beajerion ha surtout get 70 000 lur (get fas Louis Philippe) aveit paeiñ ar soudarded chomet e Brest. Arruet e Pont-Sal, emañ bet arrastet an dilijañs get torfeterion; un archer a zo bet lazhet. Netra ne vo kemeret get ar veajerion; met argant ar gouarnamant (30 000 lur) a vo skrapet. Jean Guillot a gont deomp an enklask aveit kavout al laeron. Diaes e vo o c'havout, rak chouaned int ha d'ar mare-se, ne blij ket d'ar bobl gouarnamant Louis-Philippe ha sikouret e vo an dorfeterion get ur bochad tud. Kavet e vo ur re bennak met ne vo adkavet nemet 915 lur. N'eo ket ul levr lennegel met interesus eo da lenn, rak anvioù tud ha lec'hioù anavet-mat tro-dro deomp a gaver meneget.



“Les lauriers du lac de Constance” skrivet get Marie Chaix. Marie Chaix a zo ur skrivagnerez brudet. Sekretourez Barbara e oa d'ur mare ha skrivet he deus ul levr brav diàr-benn Barbara. C'hoar vihan Anne Silvestre eo. Al levr-se a zo otobiografek. Kont a ra deomp he bugaleaj. He zad a oa ur penn-bras ag ar PPF (Parti Populaire Français), ur strollad ag an tu dehou pellañ, krouet e 1936 get Jacques Doriot. E-pad ar brezel e vo tost ar PPF d'an alamaned ha kolabour e vo tad Marie Chaix. Arrestet e vo goude ar brezel ha toulbac'het. Kavet he deus karnedoù skrivet get he zad pa oa-eñ en toulbac'h. Kont a ra deomp buhez he familh e-pad ar brezel, un tad ha ne oa ket james er gêr anezhañ. Kont a ra deomp get kizidigezh pegen diaez e vo buhez familh ur c'holabour, ar vezh àr he mamm. Skrivet brav eo ha n'eus ket ur bochad levrioù hag a gont deomp buhez an dud na oant ket ag an tu mad anezhe.

- *Evit echuiñ : Patrick en doa degaset getañ daou levr, unan e brezhoneg hag unan e galleg:*
 - **“Fahrenheit 451”**, ul levr brudet, skrivet get Ray Bradbury ha filmet get François Truffaut. An droidigezh a zo bet graet e brezhoneg get Alan Martel. Labour paotr an tan, Montag, a zo deviiñ levrioù, en ur gevredigezh he deus disfiz doc'hte, gant aon na vroudfent an dud da brederiañ. Gwreg Montag a dremen hec'h holl amzer o sellet ouzh ar skinwel hag o c'houlenn digant he gwaz labourat muioc'h. Un amezegez yaouank, Clarisse, er c'hontrol, a zo dedennet-bras gant ar pezh a gaver el levrioù ha gant ar bed gwirion tro-dro dezhi. Pa'z a Clarisse diwar wel un deiz en un doare kevrinus e kemm emzalc'h Montag hag e krog da guzhat levrioù en e di. Diskuliet gant e wreg ha gant aon da vezañ toullbac'het e tec'h. Mont a ra davet tud ouziek maez a lezenn, a zesk levrioù dre 'n eñvor, da c'hortoz distro ur gevredigezh a gompreno talvoudegezh ar skridoù.





- **“Petit pays”** skrivet get Gaël Faye . E 1992 Gaël, 10 blez, a zo é vevñ er Burundi get e dad gall, embregerour, e vamm orin a vro Rwanda hag e c’hoar vihan, Ana, en ur c’harter bourrabl get estrañjerion arall. Gaël a dremen e amzer get e vignoned, ur vandennad leun a levez: ur vuhez pempdeziek sioul hag a vo bet distrujet. Tamm ha tamm, e vez aloubet ar vro get ar feulster ha tout an traoù a chañj penn da benn buhez Gaël. Pa soñje betek neuze bout ur bugel ha tra ken e tizolo eo Tutsi ha Gall àr-un-dro, hanter-hanter.

(B. GUERIN sikouret get D. CARRE)

**Un abadenn “LENNOMP ASAMPL a vo aozet
d’ar sadorn 12 a viz Meurzh
e mediaoueg Brec’h.
Deuit niverus !!!!**